

49

PRONOSTICOU



NOSTRADAMUS.




GUIR BOLTRET
MICHEL NOSTRADAMUS,
• LABOURAT VAR EFFEJOU AN ASTROU.

GUÏR
PRONOSTICOU
AN DEN SAVANT MEURBED
MICHEL
NOSTRADAMUS,
EVIT NAO BLOAS,

*E pere e vez o guelet ar bloaveziou founnus pe
difroues, temps an ear, priz an Ed, ar Guïn,
ar Gloan, al Lin, ar C'hanap, ar Patates,
hac eus a bep seurt Marc'hadourezou alt;
evit utilite bras al Labourien, etc.*



*Troet eus an Imprimet gallec e Valanç,
e ty P. Massacr, ru an Ifern,
Hac a gaver e ty LÉDAN, e Montroulez.*



EPITAFEN

MICHEL NOSTRADAMUS,

Astrologian ha Mathematician.

MA e repos relegou an den savant meurbed
MICHEL NOSTRADAMUS , a behini ar
bluen aour ha cazi divin a zo bet a bep amzer
estimet dign da draci d'ar bed oll , herves
pouvoar an Astrou , an isçuou da zont dreist
ar rond eus ar bed universel.

Guenel a eure er guær a Sant-Remi , er
Provanç , d'ar yaou ar 4 a vis Qerzu 1503 ,
da 3 heur eus ar mintin , eus a Jacques Nos-
tradamus, Noter, hac eus a Renea Sant-Remi.

Mervel a eure e Solon-du-Craux, er Provanç ,
ar 5 a vis Even 1566 , cazi d'ar sav-eol , oaget
a 63 vloas 6 mis 1 deves 23 minut 10 second.

Ur mis qent mervel , e tioue'hanas e varo
dre ar c'homzou-mâ : *Hic prope mors est ;* da
lavaret eo : Amâ tost e ma va maro.

Predictionou general evit ar bлоa 1832.


AR GOUÂN A VEZO DIVEZAD HA GLAOEC. BEZA E VEZO CALZ A ERC'H, HAC E CHOMMO PELL VAR AN DOUAR. AL LOENED GOUEZ A VEZO QEN ASSAMET, MA VEZINT GUELET A VANDENNOU OC'H ANTRE ER C'HREYER DA ZEVORI AR CHATAL. TUD MEMES O DEVEZO AR MALEUR DA VEZA DEVORET GANTO.

COMMANDAMANT AN NEVEZ-AMZER A VEZO YEN; AR C'HREIZ A ROYO DEOMP UN NEBEUT GRIZILL, HAC AR FIN A VEZO TOM, ARNEÜS HA GLAOEC BRAS.

AN HÂN A VEZO EUS UN DOMDER DREIST-MUZUR, AR GLAO BRAS MEURBED, AR GRIZILL, AR GURUN HAC AL LUC'HEZ A VEZO PEUR LIESSA. QEN TOM E VEZO, M'O DEVEZO AN ANEVALED POAN O CAOUT DOUR HA PATURACH; AN DOUAROU A VEZO QER SEC'H, M'O DEVEZO AN EAR OUS UN DESERT. AN EOL A VEZO QER TOM, MA RENCO AR BEACHERIEN BALE EN NOS, EVIT TEC'HEL EUS AN DOMDER VRAS.

AN DISCAR-AMZER, EN E GOMMANÇAMANT, A VEZO QER TOM EVEL AN HÂN, AR PEZ A RAYO D'AN EOST BEZA ROSET. AR C'HREIZ A VEZO UN NEBEUDIC FRESCOC'H, EXCEPTET UR VRUMENNIC BENAC. AR FIN A VEZO RUST, HA CLÂNVUS. AN EOST A VEZO PELL DA VEZA MAD.

*An edou, ar gист, hac anfin, an oll varc'hadoñrez
a vezo gouell guer.*



Predictionou evit ar bлоa 1835.


AR GOUÂN A VEZO GOUAL DISAGREAPL ; E GOMMANÇAMANT A VEZO SCORNEC , CARGUET A FRIM HAC A ERC'H ; AR BLEIZI A RAYO UN NEBEUT RAVACH VAR AR MEAZ , DRE NA ELLINT CAOUT NEP BEVANÇ , ABALAMOUR D'AN ERC'H BRAS A VEZO VAR AN DOUAR. AR C'HREIZ A VEZO GLAOEC , AR PEZ A VEZO CAUS EUS UN DISCORN SPONTUS. AR FIN A ROYO DEOMP CALZ A AVEL , PEHINI A BOULSO AN DOURAYER ; BEZA HOR BEZO IVEZ UN NEBEUD SCORN , PEHINI A VEZO FAVORABL DA VADOU AN DOUAR.

AN NEVEZ-AMZER A VEZO PASSABLA MANT CAER , HA PROFITABL DA OLL VADOU AN DOUAR. AR C'HREIZ A VEZO UN NEBEUD MESQUET EUS A C'HLAO MAD-OBERUS. AR FIN A VEZO QEN AGREABL EVEL MA ELLER RESONABLA MANT EN ESPEROUT.

An edou o devezo un apparanç gaer ; ar glao a c'hoarvezo pa vezint e fleur , na noazint qet outement evel ma sonjot.

BEZA HOR BEZO UN HÂN TOM AOÜALC'H ; ARNEOU STANC GANT GLAO POUNNER ; AR GURUN A VEZO CLÊVET AVISIOU ; GOUSCOUDE AN EOST NA SOUFFRO NETRA A GUEMENTSE ; BEZA E VEZO ER C'HONTROL MAD BRAS.

AN DISCAR-AMZER A VEZO PASSABLA MANT CAER , DAOUST MA VEZO AVEL INCOMMOD HA BRUMEN , AR PEZ A VEZO CAUS A GLÉNVEJOU. CALZ TUD A VARVO.



Predictions ou general evit ar bloa 1834.

AR GOUÂN A VEZO COUNABRUS EN E GOMMANCAMANT. AR C'HREIZ A VEZO TEVAL, YEN HÆ ENOUUS. HIR E VEZO; AL LOENED NA GAVINT PATURACH NEMET GANT CALZ A BOAN, GANT AN DEODER EUS AN ERC'H A VEZO VAR AN DOUAR.

AN NEVEZ-AMZER A VEZO PASSABL EN E GOMMANÇAMANT; AN EAR A VEZO DOUÇ. AR C'HREIZ A ZISQUEZO DEOMP AR C'HAMPAGNOU QEN CAER EVEL MA ELLET EN DEZIROUT. AN DUD DIVAR AR MEAZ A VELO GANT ADMIRATION AN NATUR OUS EN EM ORNI EUS OFAREÜR, HAC'ALLAPOUCEDIGOU O NEVEZIO C'HANOUENNNOU A JOA, EVIT CELEBRI AN DISTRO EUS AN AMZER GAER. AR FIN A ROYO UN NEBEUD GLAO CONVENABL D'AN OLL GREUNIOU.


AN HÂN A VEZO TOM BRAS EN E HED, AR PEZA A VEZO CAUS DA UN NEBEUD TERZIEN HA D'UR C'HLENVED ALL BENAC. ARNEU TERRUBL A VEZO, HA GRIZILL PEHIÑI A RAI RAVACH E COSTEZ AR C'HUS-EOL.

AN DISCAR-AMZER A BAEQ GANT USUR D'AL LABONNER INGINUS AL LABOUR EN DEVEZO BET GRÊT ER SESONIOU ALL. AN EDOU A RENTO EN UN NOMBR ESTONUS.

Er bloa mā an demeziou a vezo nombrus hac eurus.

Batimanchou a arruo eurusamant er pors.

Ur c'hêlou mad a gargo an oll a joa.



Predictionou general evit ar bloa 1835.

AR GOUÂN A VEZO VARIANT ER GOMMANÇAMANT,
ADRE SCORN DU, ERC'H HA BRUMEN. AR C'HREIZ
A VEZO SUJET DA DEMPEST HA DA SCORN CALET. AR
FIN A ROYO DEOMP CALZ A C'BLAO HAC A ERC'H, AR
PEZ A VEZO CAUS DA ZIC'H LAMOU DOMMAJABL BRAS
D'AN NEB A CHOM VAR BORD AR RIVIEROU. AR BEA-
CHER EN DEVEZO CALZ DA SOUFFR.


AN NEVEZ-AMZER, EN E GOMMANÇAMANT, A
ROYO DEOMP UN NEBEUT FRIM HA CAOUAJOU GLAO
EVIT PEUR-ACHUI DA ZISSIPA RIGOR AR GOUÂN. AR
FIN A VEZO CAER HA FAVORABL DA VADOU AN DOUAR.

AN HÂN A ROYO DEOMP, EN E GOMMANÇA-
MANT, UN DOMDER FAVORABL BENAC. AR C'HREIZ
A ROYO GLAO, LUC'het hac un tarz curun benac;
HEP OBER GAOU. AR FIN A VEZO MAD D'AN EOST.

AN DISCAR-AMZER, ER GOMMANÇAMANT, A VEZO
CAER MEURBED, MES SUJET DA CHENCHEDIGUEZ,
PERE GOUSCOUDE A ROYO UN AMZER FAVORABL EVIT
AN EOST, HAC A VEZO ABONDANT BRAS. AR C'HREIZ
A ROYO AVELIOU FOLL, BRUMENNOU PERE A OCASIONO
MEUR A ŜEURT CLÉNVEJOU. AR FIN A VEZO GLAOEC.

*Ut loen furius ha sauvach a rayo calz a ravach en
ur brovinç.*

*An neb o deveus chatal a dle qemer soign outo,
rac calz a vleizi vo er bloa-mâ.*



Predictionou evit ar bloa 1836.

AR GOUÂN A VEZO RUST, HIR HAC ENOUUS BRAS;
AN ERC'H A VEZO PELL BRAS VAR AN DOUAR, MES
AR C'HEUNEUD NA VEZO QET QER.

AN NEVEZ-AMZER A VEZO CAER AOÜALC'H EN E
GOMMANÇAMANT; GOUSCOUDE E VEZO VARIET DRE
UN NEBEUT SCORN. E C'HREIZ A ROYO DEOMP GRIZILL
ALIES; HA VAR E FIN E COUEZO CALZ A C'HLAO.


*Ar c'hanap hac al lin a vezo muioc'h abundant
eguet na dleyet credi.*

AN HÂN, EN E GOMMANÇAMANT, A VEZO TOM
MODERET, GANT UN NEBEUT GLAO MAD-OBERUS. AR
C'HREIZ A VEZO DOUC HA MODERET. AR FIN A VEZO
TOM BRAO EVIT MEÜRI AN EOST, PEHINI A VEZO A-
BONDANT, AR PEZ A RAÏ D'AN EDOU.BEZA GUELLOC'H
MARC'HAT EGUET ER BLOAVEZIOU DIAROC.

*Un demezi eus an estonnussa a rayo calz a vrud
en Europ.*

AN DISCAR-AMZER A ROYO DEOMP UN DOMDER
BENAC, PEHINI, PELL DA NOAZ, A VEÜRO AR REZIN.
ÈR C'HREIZ HOR BEZO UR VRUMEN BENAC, BAC AR
FIN A VEZO HUMID GOUELL ALIES.

*Ar C'hommerç a yélo erfat, ha calz a lestrou eus
an Indes a erruo en hor bro, cargueteus a bep seurt
marc'hadourez.*



Predictionou general evit ar bloa 1837.

AR Gouân a vezoyen, coumoulus hac humid,
An avel Mervent, vardro ar c'hreiz, a zi-
gâço deomp scorn, fîim hac erc'h, pere a
chommo pell-amzer var an douar.


An Nevez-Amzer a vezodouç, tamperet, ha
mad evit labouriou an douar. Ar Piz, ar Fao,
an Harico a vezodeus ar guella qalite. Gallout
evezo hardimant o lezel da zec'hi hac o chont-
servi evit o hada er blaves varlerc'h, rac pro-
dui a rint calz coulz hac ar patates.

A Hân, peguement benac ma vezohumid,
na vezozet nebeutoc'h favorapl da vadou an
douar. Uu arneu benac a vezoz, hac an avel a
vezo gouell grén; mes daoust da guementse,
an edou a vezoz caer ha founnus.

*Ar bloa-mâ ar C'homerç a brospero calz; guelete
vezo ul labour continual er porsiou-mor, rac a bep
lec'h ec'h arruo hac e partio calz a vatimanchou.*

An Discar-Amzer a vezoz er caer ha ma el-
fet en desirout. An eost a vezoz qen abundant,
ma vezogant calz a boan cavet hircher aoüale'h
da zestum an edou a broduo.

*An amzer a vezocommod meurbed evit an hada,
ha güin Bourdel a erruo en abondanç en hor porsiou-
mor. Listri an Douar-Nevez. a ereuo en hor bro.*



Predictionou general evit ar bloa 1838.

AR GOUÂN A VEZO HIR ; AN ERC'H A CHOMMO
APELL BRAS VAR AN DOUAR ; AR GLAOYOU BRAS A
LAQAYO AR RIVIEROU DA GRESQI SPONTUS ; AR SIN A
VEZO GOUEL ENOUUS.

AN NEVEZ-AMZER , A VEZO QER CAER, M'EN EM
GREDO AN DUD EU UR BARADOS. AR GOUEZ FROUEZ
A ROYO AR C'HAERA ESPERANÇ ; AR PRAJAYER A VEZO
QER CAER , MA SAILLO AL LOËNED GANT JOA, AR PEZ A
RENTO AN DUD LAOUEN ; MES AR SINOU CAER-SE A
DREMENO PREST, RAC AN ED A VEZO SUILLET GANT AN
ARNEOU FRECANT A DEUYO DEMP EUS AN NORD.

*An neb a veo zo bet prudent aoüalch o devezo
grêt pourvision doubl er bloa aroc.*


AN HÂN A VEZO QER TOM, NA GAVO AR BEACHER
AL LOM DOUR DA STANCA E SEC'HED , NEMET GANT
POAN ; AR FROUEZ A ZISEC'HÔ QENT MEÜRI, AR GÜIN
HAC AR GISTR AYEZO GOUELL GUER.

Clévet e vezo comz eus ur grenamant douar.

AN DISCAR-AMZER A VEZO FAVORABL EVIT DESTUM
AN NEBEUD ED A VEZO ACHAPET OUS AN AMZER FALL.

*Aruout a rayo en porsiou-mor , nombr bras a
vatimanchou carguet a varc'hadourezou eus an
eneziou , ar c'hommerç a brospero.*

*Nombr bras a zemeziou a vezo , ha casi tout a
vezint eürus.*



Prediction general evit ar bloa 1839.


AR GOUÂN A VEZO DIVEZAD, CLÉNVEDUS ER GOMMANÇAMANT HA SUJET D'AR RHEM, etc., DRE AN AVELOU NORD A RËNO ER C'HREIZ, HA NA CESSION NEMET GOODE BEZA GUENNËT AR C'HÆRIOU HAC AR C'HAMPAGNIOU EUS A UN ERC'H QEN TEO, MA COMETO AL LOENED GOUEZ CALZ RAVACH, DEFOT BOUED, HAC A VIRO AR BEACHERIEN D'EN EM LAQAT EN HENT. **Ar fin a vezo scor nec**, gant frim ha glao.

Commançamant an Nevez-Amzer a vezo caer passabl. Ar c'hreiz a vezo mesquet a c'hlaou madoberus ; e fin tom hac arneus. Al luc'hed hac ar gurun a vezo guelet ha clévet alies.

An Hân, er gommançamant, a vezo agreabl, avichou un nebeud glao bian a rayó profita an edou, a vezo sclear, mes an damoezennou hir ha founnus a c'hreun. Gouscoude e vezo calz a ed dêved. Ar guiniz du a vezo abundant, amzer an hada o veza en em gavet commod. Didomagi a rint al labourer eus e oll boaniou.

An Discar-Amzer a royo da goumanç amzer sclear. Ar c'hreiz cazi memes tra, sepet ur vrumen benac. Ar fin rust ha sujet d'ar c'hlénvejou. An abondanç a frouez a vezo caus d'ar fluz, etc. Laqit eta evez mad.

Ar C'hommerç a vezo florissant.



Predictionou general evit ar blou 1840.

AR GOUAN a vezò humid ha tenval er gommançamant. Ar c'hereiz a zigasso avel reter, a burifio an ear. Ar fin a royo deomp un amzer erc'h ha scornec , gant grizill hac avel.

An Nevez-Amzer a vezò agreabl aoüalc'h er gommançamant. Ar c'hereiz a ziscuelo ar parqeyer hac ar prajeyer quer caer ha ma eller en desirout. Ar fin a rayo deomp ancounac'hat antieramant ar rigor eus ar gouân tremenet.

An Hân a vezò tom , mes eus a un domder tamperet , a betra e c'hoarvezo un eost abundant. Evit ar pez a sel ous an ear , an arneou a vezò terrubl abalamour d'ar grizill , pehini a zistrujo calz a blant varzu ar c'hus-eol ; mes ar vro-mâ na zouffro netra eus a guementse.

Ar c'hanab hac al lin a brospero calz er blos-mâ.

An Discarg-Amzer a royo deomp un amzer favorabl evit dastum an ed , pehini a vezò en ur gantite quer bras evel ma eller en desirout , ar pez a rayo dezàn diminui a bris.

Guelet e vezò , e commançamant ar blos calz a sinou en ear. Meur a hini a sponto o sellet oute.

FIN AR PRONOSTICOU.



A VERTISSAMANT

*Necesser bras da bep den evit ober abred
pourvision e dieuez, observet gant tud ancien.*

Ober pourvision ed ha dillad e mis Guengolo.

Ober pourvision güin e mis Du.

Ober pourvision queuneud hae amann e
mis Mae.

Ober pourvision qic da sala e mis Qerzu.

Ober pourvision froues e mis Eost.

Ober pourvision pesqet e mis Guenveur.

Ober pourvision heaul ha soa e mis Here.

Prena neud e mis Meurs.

Prena Qezec, eugenet, saout ha deaved e
mis Ebrel.



PREDICTIONOU EVIT PEB MIS.

GUENVEUR.

Meuragueuin en em orno eus a blun ar paün.

C'HUEVRER.

C'hoarigaereviturmenezohenelullogoden.

MEURS.

Fin terrubl eus a un den brudet bras.

EBREL.

Crenamant douar, apparition ur menez tân.

MAE.

Tempest var vor. Fin gloriis un den pîissant.

EVEN.

Stereden losteq. Aoun hep droue.

GOUERE.

Action gaer eus ur soudard yaouane.

EOST.

Eureou sod, hac a blich d'an den.

GUENGOLO.

Boneur ha maleur. Evelse e za ar bed.

HERE.

Chanchamant bras e meur a dra.

DU.

Nep azer e lagad d'ar maleur, a griod'e dro.

QERZU.

Brad brezel ha c'hoant peoc'h.

